

KIS-815 – Ar strafuilhoù anaoudel en deskiñ (II)

[Troidigezh ar pep all eus ar pennad gant Abdelhamid KHOMSI¹ a voe embannet un darn anezhañ en notenn KIS-787, La-15, pp. 376-382. Dediñ eo e labour treiñ gant Yann Varc'h THOREL da goun Herve KERRAIN]

(YVT – 20 02 04)

AN DIV ZENESADENN BENNAÑ

Un embregadenn gwall amaes zo eus hennadiñ ha deskrivañ ar strafuilhoù anaoudel en deskiñ, evit meur a abeg, a daolfomp pled ouzh daou anezho pergen : al lies doare da zisplegañ ar c'hwitadur skolel, eus un tu, hag, eus an tu all, an nevesaat a zegas an imbourc'hioù bredoniell, anaoudel peurgetket, d'hon damani, ken e par an damkanañ ken e par an embreger.

Dav eo teurel evezh, evit gwir, ez eus daou bar bras a zespizadurioù, pe a zeskivadurioù, evit pep hini eus ar strafuilhoù a vo anv anezho amañ, evel evit kement rizh miarc'hwelioù^a 'zo : hini an arbennoù^a ha hini an azonoù^b.

AN ARBENNOÙ

Er par kentañ e pleder gant arbennoù ar miarc'hwelioù, ha, pa nad int ket kreudien^c ent strizh, e vez diaes kenan o dinouiñ. Stadañ a reor neuze e vo ar reizhiad displegañ pennañ kevredadel, bredel-kantaezel pe nerverl-bevedel, diouzh ar salead, diouzh kealiadurezh ar gendehaezerien pe c'hoazh diouzh o stummadur diagent. Ne vo ket anv amañ a zistalvoudañ hini pe hini eus ar parennoù displegañ. An eil re pe ar re all — hag an eil re kevredet gant ar re

^a Sl. La-16, p. 165.

^b Sl. La-16, pp. 165-166.

^c Sl. La-16, p. 168.

all a-wezhioù ivez moarvat — a c'hell ober meiz war rizennoù resis ar c'hwitadur skolel pe war arvezioù hollek 'zo anezhañ. Mes ouzhpenn m'o deus ar skolioù nebeut a araezioù gwezhiañ war an kez parennoù — o frederiañ ned eo ket, diouzh pennaenn, unan eus o c'hefridioù —, e c'haller dizoleiñ neradoù a vugale o deus strafuilhoù anat en deskiñ, hep ma c'hallfed kavout dezho un orin a rizh anaoudel, evel parenn displegañ nemeti bepred. Ret e vez neuze *ezkaelañ* ar strafuilhoù skiantennel (ar gweled, ar c'hleved), ar strafuilhoù bredel-kantaezel ha, c'hoazh, ar strafuilhoù kefredel. Kement-se ned eo ket lavarout ne c'hell ket darn a 'n kez strafuilhoù bezañ *kevredet*, en ur furm gwanaet kenan, gant arbennoù ar miarc'hwelioù a vo anv anezho amañ.

AN AZONOÙ

En eil par, e teskriver arouezioù arselladus, azonoù. Tre e diazalc'h an araezioù kalvezel hag arlakadel arseliñ ha dewerzhañ ez eur neuze. Evel-se e vez graet an deskivadurioù, en desteriadurioù klasel (mes bremañ alies c'hoazh), e rezh forc'hadoù diouzh ar reolded (pe *fazioù*), adalek an arselladenn rageeun : komz a reer, lakaomp, a *lavar babig* e strafuilhoù al lavar teodel, pe a *gemmesk el lizherennoù* e strafuilhoù piaouekaet al lavar skrivet. Kentradiñ amprouennoù skoueriekaet, prouadoù savet evit pep rizh a viarc'hwelerezh a dalvezo neuze da zeskrivañ resisoc'h, dre ur c'heñveriañ reizhiaddek gant strolladoù bugale a 'n un oad pe a oadoù all ha dre savelañ an digonadurioù tremenet da *reol* evit pep strollad. E stern ar skol ez eus ezhomm, e par an dizarbenn, eus an hentennerezh-se a ro tro, dien, da zinoiñ ar vugale o devez diaesterioù ha, gwezhave, bugale *war riskl* : na c'hortoz an diournat, diwezhat peurliesañ, a-barzh mennout un emelladenn. Div gudenn a sav ganti avat : hini erverkadur ar bevennoù, da gentañ, pe e ve anv eus liveoù digonadur pe eus damanioù a viarc'hwelioù hag eus o darempred goulakaet ; hini gevazasted an damkanerezhioù a ro tro da sevel an amprouennoù dewerzhañ, da eil.

Gouzout a ouzer e vez, en ur boblañs undouez, dasparzhet al liveoù digonadur a bep tu da'r c'heidad, eus an izelañ da'n uhelañ. Start e vez, a-wezhioù, savelañ ar spisverkoù a ro tro da c'houzout hag a-uc'h da'r *reolded* emeur, en ur maez a *strafuilh*, ha diouzh ret en em gavor a-dal d'un nerad a zegouezhioù argefin amaes o rummata. A c'hiz all, mes evit abegoù

heñvel, ne oufed lavarout mann a-zivout dizunvanded darn eus ar strafuilhoù : daoust ha diforc'hiñ a ranker, er strafuilhoù e piaouekaat al lavar skrivet, lakaomp, ur miarc'hwelerezh el lenn diouzh unan ar reizhskrivañ, evito da vezañ kevredet ? Ha penaos displegañ a c'hiz all e c'hallfe bezañ diforc'hioù digonadur en div gedelfenn-se, enodiñ hag ec'hodiñ, a'l lavar skrivet ?

PE ZAMKANEREZH^a ?

Ma ned eo ket amkan an amprouennoù dinoiñ ar vugale enket, pe *war riskl* da vezañ enket, ken, mes deskrivañ ar miarc'hwelerezh e sigur despizañ ivez un erdrevnad da ensammañ prederiadur a 'n kez bugale, e vezo o zalvoudegezh diouzh kevazasted an damkanerezh soliet warno : tro a vo neuze da veizañ ha neket da zinoiñ hepmuiken. Dav eo da unan kaout en e gerz un damkanerezh a 'r vredienezh^b evit pep damani, en amveziadoù gwerc'hel, hag un damkanerezh a zispleg an etreweredoù a c'hell bezañ etre an damanioù evit dibab an doare gwellañ da wezhiañ. Pell emaoomp c'hoazh ac'hann di. Merzhout a reomp kalz gwelloc'h, da skouer, ar strafuilhoù e piaouekaat al lavar skrivet — ar milenn pergen — eget strafuilhoù ar c'hevregañ hag al loc'hadelezh tanav : an niver bras a imbourc'hoù war ar re gentañ en deus roet tro da savelañ damkanerezhioù spisoc'h, ha da lakaat en hon c'herz un deskrivadur klokoc'h eget evit an eil re. Hevelep amveziad a laka, a hent all, ar c'heflen etrezo, stadet alies², da vezañ treuzveizet : ned eo ket savelet durc'hadur arbennel an kez keflen. E se ne c'haller ket lavarout ha dont a ra strafuilhoù ar c'hevregañ eus ur *boaz da skrivañ fall* e sigur kuzhat fazioù reizhskrivañ, evel m'en lavar darn eus an aozerien, pe en eneb, ha gourlakaat a ra strafuilhoù al loc'hadelezh tanav ur *revec'hiad anaoudel* dres da'r c'houlz ma tesker lenn ha skrivañ gerioù, el live 1, o tiaezañ evel henn an deskoniadur.

PE STERN ?

Klask a reomp, en hir a zigoradur-mañ, kinnig, ar spisañ ar gwellañ, ar stern a c'haller despizañ ha deskrivañ ennañ *strafuilhoù anaoudel an deskiñ*.

^a Sl. La-16, p. 167.

^b Sl. La-16, p. 168.

Anat eo, ned eo ket spis c'hoazh an derc'hadennoù hon eus eus ar strafuilhoù-se, nag eus o azonoù nag eus o arbennoù : henn a laka diaes o despizañ hag o deskripañ. Sed m'hon eus divizet sellout ouzh ar miarc'hwelioù diorren diouzh dezverkoù gwezhiadel, hervez KAVALE, FORMESS ha LORSBACH³, en ur ziforc'hiñ pevar live deveizañ : hini o despizadur dre ezkaelañ, hini o deskriadur, hini o natur hag, erziwezh, hini un nebeud goulakadennoù a c'haller klask ober evit o displegañ.

AN DESPIZADUR DRE EZKAELAÑ

Gwelet hon eus e vez deznaouet an darn vrasañ eus ar miarc'hwelioù a bledomp ganto dre ezkaelañ ar strafuilhoù skiantennel, bredel-kantaezel ha kefredel. Hag evel henn ez int deskrevet e *Dornlevr deznaouiñ ha stadegañ ar strafuilhoù bred* (DSM-III-R, 1989, Masson, Paris), m'emaint renket e rummad *Strafuilhoù spesadel an diorren*, pezh zo un doare all d'o despizañ dre ezkaelañ. Ennañ ez anzaver koulskoude ez int strafuilhoù diournet ha prederiet ent voas er skolioù ha neket er reizhiadoù bredarouelañ, hag e c'haller nageniñ ar renkadur anezho e-touez ar strafuilhoù bredel. A-bouez eo neuze studiañ, berr ha berr, an tri rummad ezkaelañ a gaver peurliesañ, hag an hini diwezhañ anezho pergen.

AN EZKAELADURIOÙ AR STANKAÑ

Ned eus ket anv ebet ganeomp da zistreiñ war ezkaeladur ar miwel pe ar miglev, an dallentez hag ar vouzarded pergen, eus an hollad despizet amañ. Koulskoude e tleer ematersiñ a-zivout arskaregezh pe gendalc'hegezh ar strafuilhoù skiantennel. Evel-se en devez ur strafuilh kuñv a'r c'hleved (*isklev*) ur gwered, a c'hell bezañ kreñv ha padus, ken war biaouekadur al lavar teodel ken war hini al lavar skrivet. Heñvel dra e c'hell ul leiad a'l lemmedd weled (*bouc'hwel*) degas strafuilhoù 'zo e piaouekaad al lavar skrivet, evel m'en diskouez ar rendaeloù diziwezh a-zivout perzh ar gweled e rizhoù milenn 'zo (LOVEGROVE⁴), goude m'eur emglevet bremañ evit nac'h e zegemer da bennarbenn a'r miarc'hwel. An hevelep poellata a c'haller kaout, evel reizh, evit ar strafuilhoù bredel-kantaezel pe kefredel skañv. Mes gallout a reer ematersiñ, evit an eil re bepred, a-zivout ar c'hilskog a c'hell

kaout nep strafuilh a'n deskiñ war bersonelezh pe meizegezh ar skolidi. E se ne weler ket penaos e c'hallfe ar c'hwitadur skolel na werediñ war bersonelezh ar vugale, nemet en ur rizh dibar bennak e ve ; ha ne weler ket gwelloc'h penaos ne zegasfe ket en distro kudennoù e piaouekaat ar barregezhioù — na pa ve dindan ar gwered *Mazhev* (STANOVICH⁵) a laka « *ar re baourañ da baouraat hag ar re binvidikañ da binvidikaat* » — diaesterioù kefredel a bouez.

PETRA EO AR VEIZEGEZH ?

Dav eo, erziwezh, plediñ a dostoc'h gant kraf ar veizegezh. An dezverk pennañ a ezkaelañ ez eo : kavout a ra da'n den e spir deznaouiñ un *dilerc'hegezh vred*^a, petra bennak a ve he arbennoù, evit displegañ holl strafuilhoù anaoudel an deskiñ. Ned eo ket aes despizañ ar veizegezh avat. Evel se e kav da STERNBERG⁶ — pa zezrann ar respontoù a rae imbourc'h-erien, arbennigourien war ar veizegezh, d'un atersadeg a-zivout natur houmañ — e tisoc'hont diouzh menoiù andassell, anemouez, menoiù a ginnig eñ o eztaoliñ e rezh *leterc'hadoù* war-benn meizañ gwell an atersoù stignet gant an damkanerezhioù. Da zisplegañ mennoziù an aozerion a-zivout ar veizegezh e tisparti STERNBERG seizh leterc'had :

SEIZH LETERC'HAD AR SPERED

PEZH LETERC'HADOÙ DINDAN MENNOZ AR VEIZEGEZH ?

Al leterc'had glennadel

Anv ez eus amañ eus despizadurioù a zo o amkan lakaat a-wel poentoù tarzh an diforc'hioù etre hiniennoù, dre amprouennoù pe brouadoù, strollet a stelladoù alies. Gant harp keweriadoù stadegel azas e klasker hennadiñ ur barenn pe meur a hini — en o zouesk parennoù ezgeriadel ha digonadel ar WISC (ar stellad prouadoù arveretañ da briziañ ar veizegezh) — a lakaer da zeskrivañ ur stad ha, dreist pep tra, da zarganañ ar berzh skolel, lakaomp, en un doare tregemmel. Gallout a

^a Sl. La-16, pp. 191-192.

ra tennañ an doare denesaat-mañ, dre arvezioù 'zo, gwezhave, d'ur meni bredoniezh ar gouestedoù.

Al leterc'had stlennegel

Dindanañ e kaver an 'damkanerezhioù' a glask deskrivañ argerzhioù ar c'heweriañ stlenn hag an diluziañ skoulmadoù dre zinoiñ reolennoù hollek arc'hwelerezh ar gouzrec'hioù dirak ar poelladoù kinniget dezho. Ha diforc'hekaet (hogos) diziwezh e c'hell bezañ an argerzhioù dinoet. Stiañ ouzh reolennoù hollek a laka unan da goll e gizidigezh ouzh an diforc'hioù hiniennel, nemet en un nebeut imbours'hioù klinikel a dennfe d'ar vredouriezh e ve.

Al leterc'had bevedel

An despizadurioù o hevelebiñ an arc'hwelerezh anaoudel ouzh hini an empenn a denn da'n kez leterc'had, dre zeskrivañ un den neuronel hervez bomm CHANGEUX. An damkanerezhioù nervvredoniel-se a glask dinoiñ arbennoù nervel evit kement miarc'hwel anaoudel 'vez, pe o raklakaat pa na vezont ket naouadus, en ur zegemer e roy tro an araokadennoù kalvezel bras a anavezer bremañ da savelañ ur wir nervskiant^a.

Al leterc'had gouiziadoniel

Da zamkanerezh PIAGET a-zivout ar ouiziadoniezh dedarzhel e taveer amañ; pe, mar kaver gwell, d'un damkanerezh a'n diorreadur dre bazennoù eus an devezout poellel ha furmel. Hevelep stiadur avat en laka diaes da arverañ en diavaez eus e stern kentañ — pa van kantet en ur gougon hollek-tre, goubarek-bras — amgizidik ouzh an diforc'hoù hiniennel.

Al leterc'had denoniel pe stuzegelour

Evit damkanerezhioù 'zo emañ ereet ar veizegezh ouzh metou sevenadurel ar gouzrec'hioù; ober a reont anezhi, lakaomp, ar c'houested da emazasaat diouzh un drevlog roet. An dilañs kedvuhezel ^b, a dremener alies da arbenn ar c'hwitadur skolel, a dennfe da'r stern damkanel-mañ er feur ma raklaka un dic'houested da emazasaat diouzh ur sevenadur kornogel ha kêrel a vez ar skol kedrann greiz ennañ. An

^a Sl. La-16, pp. 192-194.

^b Sl. La-16, pp. 191-192.

denesadenn-mañ, dre ma 'z eo deskrivadurel peurgetket, ne c'hell ket ober meiz war c'houested hollek an deskiñ, boutin da vab den.

Al leterc'had kevredadel

Koulz hag evit al leterc'had gouziadoniel ne c'haller daveiñ met d'un devezour : VYGOTSKI. Meizañ a ra diorreadur an anaout evel o tinaouiñ diouzh etrewezhiñ ar bugel gant tud e endro kevredigezhel (kerent ha kelennerien, lakaomp), dezho ur saviad a wehenterezh. Gwehenterezh hemañ a gevaraez ar bugel, eus un tu, da spislec'hiañ en e endro an anaoudegezhioù hag an argerzhioù da biaouekaet hag, eus an tu all, da frammañ ar stern ma c'hallo diabarzhelaat an kez anaoudegezhioù hag argerzhioù.

Al leterc'had reizhiadel pe gougevanadel

O stadañ strizhded hag abegadusted an darn vrasañ eus denesadoù damkanel ar veizegezh e fell da STERNBERG savelañ un denesad gougevanadel, gwall amaes da lakaat er pleustr. Ne gaver met nebeut a argeziadoù, en o zouesk hini STERNBERG e unan (1985) anezhañ un damkanañ teirurzhek o tezrannañ ar veizegezh a-geñver gant ar c'hemperzh (oad, metou, h.a.), gant an dianouezañ pe gant ar boaz ouzh ar poelladoù hag ar chem anaoudel piaouekaet.

ARVERAÑ PROUADOÙ

Dre benn da'n diaester bras, ma n'eo ket da'n dic'hallusted, a zo da zespizañ ar veizegezh (pezh a zo ret-holl koulskoude evit deznaouiñ ar miarc'hwelioù skolel, evel gwelet kentoc'h), ez eo an diskoulm gwellañ, war henn e laka GREGOIRE⁷ ar pouez ivez, arverañ prouadoù, savet ent kantouiziat hag ent andamkanek dre ret, o vezañ ma roont tro da zeskrivañ diforc'hioù hiniennel. Neuze e c'haller priziañ un *oad bred* pe jediñ ur *rannad meiz* hag o c'heñveriañ ouzh re hollad ar boblañs bet lakaet da stalonañ ar prouad. An dislankoù etre ar c'houested dezastumet pe vartezeet diwar disoc'hoù ar prouad hag al live gwerc'hel arsellet en un arvez dibarek eus an diorreadur an hini a ro tro da zezren ur strafuilh *spesadel*. Nes emamp amañ, splann eo, da'l leterc'had glennadel hervez STERNBERG, an abeg eo ma vez distaolet feuls gwezhave hevelep rizhoù a brouadoù pa damaller dezho diasavegezh ar muzulioù a roont (un dislank a stader mes, pa n'eur ket evit e zisplegañ, e

lakaer nend eo ket ardreuzat) hag un tuadur galloudel da rummata an kez muzulioù (sl. GOULD, 1983, evit un dezrann deurus kenan ⁸).

Dre ma n'eo ket disoc'het (c'hoazh) an denesadennoù all ouzh ar veizegezh gant benveg gwezhiadek ebet a ve bet degemeret gant an holl, e lakaor, daoust da bep tra, ez eo muzuliañ ar veizegezh dre brouadoù un araez ret, daoust ma n'eo ket bastus, da ziverzhout ar vugale dalc'het gant *strafuilhoù anaoudel en deskiñ*. Evel evit an arvezioù all eus an despizadur dre ezkaelañ (divig skiantennel ha strafuilhoù bredel-kantaezel), ne c'haller e ober ken nemet ez arverfed an disoc'hoù gant ersell bras, evel poent loc'hañ un dezrannañ klinikel spisoc'h etrezek arvezioù all a'n arc'hwel anaoudel en araez da spisaat ar miarc'hwelerezh.

DESKRIVADUR AR STRAFUILHOÙ

Mar rankfed plediñ hepken gant ar strafuilhoù skolel a c'hallfed eren ouzh ar gelennadurezh, hag a zo anezho unan eus rummadoù *Dornlevr deznaouiñ ha stadegañ ar strafuilhoù bred*, n'en defe unan ken met deskrivañ ar strafuilhoù e piaouekaat al *lenn-skrivañ-jediñ* anavezet mat.

DIBAB AR STRAFUILHOÙ DA ZESKRIVAÑ

Koulskoude, dre benn da berzhioù ar skol, n'eur ket evit ezkaelañ strafuilhoù al lavar teodel, na kennebeut strafuilhoù al *loc'hadelezh*, renket gant an hevelep dornlevr e stern « strafuilhoù spesadel an diorreadur ». Al lavar teodel, goude dezhañ diorren da gentañ hag, evit al lodenn vrasañ anezhañ, e stern an tiegezh, a vez dezhañ ul lec'h bras er skol vamm, lodek ma 'z eo e raklun diougonadel houmañ. Ur roll diaraoger en deus, war ar marc'had, e piaouekaat al lavar skrivet⁹. Ha dre abegoù damheñvel ez eo ken amaes ezkaelañ strafuilhoù al *loc'hadelezh* tanav ha, dreist-holl, re ar skritur, kevredet gwezhave gant an diaesterioù e piaouekaat al lavar skrivet, goude ma n'emañ mui neuz ar skritur e-touesk damantoù pennañ ar skol hiziv.

Plediñ a refomp enta da zespizañ hollad an kez strafuilhoù, en ur lezel a-gostez, da c'hortoz, un aridennad atersoù o tennañ da'n oad ma teraouer kemer preder ganto, da'n eiltroüsted ha/pe da'r badusted anezho ha da'n ereoù a c'hell bezañ etrezo. Divizet hon eus o c'hinnig enta, diwar o erzerc'hadoù

azonel e stern ar skol, en ur arwerc'hañ al lavar teodel da gentañ, hag en ur lakaat a-gostez strafuilhoù al loc'hadelezh.

AR MEIZAN

Da gentañ ez eo dav arwerc'hañ kraf ar meizañ. Bremañ, mes nevez a-walc'h eo, ez eus kenglev pa studier miarc'hwelioù al lavar evit lakaat e kont an ec'hodiñ koulz hag an enodiñ. Mes amjestr eo an engwezhañ : diaes eo deskripañ pezh eo ar meizañ. Lies kudenn a sav evit e briziañ, ken da'r vredourien ken da'r gelennerien. An disoc'h e vez hi alies eus ur c'henwered etre keweriañ ar stlenn yezhel ha keweriañ ar c'hemperzh. Disoc'h an kez kenwered an hini a arseller peurliesañ, hep gallout digemmañ an div gedrann, nemet e plegennoù aozet war an amboaz-se e ve.

E lec'h all hon eus bet tro da ziskouez¹⁰, en ur blegenn ma lakaed bugale da vizañ skeudennoù, ne c'halled ket arwerc'hañ ar meizañ hervez an termenoù *reizh* pe *direizh*, nemet e tleed e zezrannañ diouzh an erdrevnadoù arveret a ziuz kentañ, pezh na dalvez ket ne vez ket arveret re all. Dibaot eo e ve dezrannet ar meizañ en doare-se, rak se e chom amspis an derc'hadenn anezhañ a denner eus an deskrivadurioù a zo bet graet eus ar miarc'hwelioù. Koulskoude en en damvenegont holl e stern an azonoù a daolennont.

Alies e teskriver ar miarc'hwelioù diwar ar forc'hadoù diouzh ar reol, e tu an ec'hodiñ evit a sell al lavar teodel, hag en un doare luzietoc'h evit al lavar skrivet. Ober a refomp diouzh ar boaz-se ha kinnig berr ha berr ar strafuilhoù a zo liammet splann ouzh damantoù an ensavadur skolel.

STRAFUILHOÙ AL LAVAR TEODEL

Deskri vadur an kez strafuilhoù a vez graet peurvuiañ diwar gedrann strafuilhetañ ar yezhañ. Lakaet er-maez ar vugale o deus strafuilhoù grevus er c'hehentiñ, na c'haller ket fiziout o frederiadur er skol, e pledor da gentañ penn gant ar c'hedrannoù mouezhiadel ha kevreadurel, a vezo disrannet, en ur c'houzout ez eo rouez kavout digevret an div rizhenn strafuilhoù-se.

AR GOULERC'H ER GOMZ

Naouiñ a ra alies an azon a reer *goulerc'h er gomz* anezhañ dre an tech da eeunaat luniadoù leñvennel ha mouezhiadel (ar c'hensonennoù pergen). En degouezhioù eizhañ e vez direet al leñvenn d'ul luniad kensonenn-sonenn ha koazhañ a ra niver ar c'hensonennoù hegerz (betek unan ken gwezhave). Dibaot eo e vez strafuilhet c'hwivad ar vouezh ha korvez ar gomz. Pa vez mouezhiadel ar strafuilh pennañ ne vez ket divigek ar meizañ diouzh ret : bugale eo a arver alies erdrevnadoù meizañ a-geñver gant o oad, mes merkañ a reer gwezhave e tistrec'hont dre berzh o live meizañ an diaes eo dezho naouaat ar gerioù, ar re o revout dibaot pergen.

STRAFUILHOÙ AR C'HEVAOTAÑ

A-bouez eo diforc'hiñ ar goulerc'h er gomz diouzh *strafuilhoù ar c'hevaotañ*, a c'hell mont eus un amvarregezh hollek da zistagañ gerioù, n'eus forzh pegen kemplezh e vent ent vouezhiadel, d'ur migevaot kantet en un nebeud soniadoù (ar *zeal* zo unan anezho) : stummoù dibarek kavenn ar genou pe un divig loc'hadel a vez peurliesañ e devoud ar strafuilhoù-se, nad int ket da renkañ e tachenn an anaoudelezh. E se, ar gagerezh a lezimp ivez a-gostez.

AR GOULERC'H EL LAVAR

Evit ar goulerc'hioù el lavar teodel, trec'h enno an arvez kevreadurel, e naouont dre un tech da'n eeunaat ivez ; ganto eo al luniadoù neuziadurel ha kevreadurel a vez tizhet. En degouezhioù eizhañ ne vez ken miret nemet ar geriadoù (pennanvioù, verboù, adanvioù), ar yezhadoù (gerioù mell, raganvioù, stagelloù) o vezañ pe zisleber pe steuziet. Dav eo merkañ e vez ar re gentañ kerc'husoc'h (toniet int) ha stlennec'h. En eneb e vez ar re all antoniet, amstlennec hag a-c'hourleizh gant unvezioù all pe gant an darlez. A-c'hin d'a c'hoarvez gant ar strafuilhoù a rizh mouezhiadel trec'h, e chom salv ar meizañ ral a wezh amañ ha tizhet bras e c'hell bezañ, diouzh derez ar c'hrevusted. Dav eo merkañ en diwezh e vez dalc'hmat kevredet an kez strafuilhoù gant strafuilhoù a rizh mouezhiadel a laka seul vrasoc'h ar skoilh ouzh ar c'hehentiñ hag aliesoc'h ha primoc'h ar mont davit kuzulioù.

UR GOULERC'H EN DIORREN ?

Peogwir e tenn hevelep digonadoù da zigonadoù bugale yaouankoc'h ez eur techet d'o lakaat da c'houlerc'hioù en diorreadur, tonket da steuziañ. Ha gwir eo, ma ne bleder met gant un nebeud degouezhioù, ha ma ne daoler pled

met ouzh gerioù diged : steuziet, displeber pe reizh. Un dislank splann zo avat e degouezhioù all etre keweriañ ar gerioù ha keweriañ an dezgeriadoù, hag an eeunadurioù stadet a hañval disoc'h diouzh ur meni erlev da warediñ ar stlenn. Peadra zo da emc'houlenn perak ha penaos, ha pa na c'hallfed daveiñ respont peurvastus ebet.

AR STRAFUILHOÙ LEZET A GOSTEZ

Dav eo merkañ en diwezh, daoust ma anavezer ha ma titourer mat strafuilhoù al lavar teodel gant ar vugale vihan, er skol vamm pergen, ne bleder ket nemeur gant ar re a c'hell padout diwezhatoc'h, kalz strewekoc'h ha mareadekoc'h. Gant na vefont ket ur skoilh ouzh ar c'hehentiñ e vefont lezet a-gostez er skolioù kentañ derez (pe en tu-hont zoken) ha komz a reor eus kudennoù live yezh pe a « zivig kedvuhezel ». Un toullad mat a imbourc'hioù a ziskouez koulskoude e c'hellont padout, ha kenbadout gant strafuilhoù 'zo e piaouekaat al lavar skrivet (HUET)¹¹.

STRAFUILHOÙ AL LAVAR SKRIVET

*(Ar rann-mañ eus ar pennad a gaver embannet en notenn
KIS-787 – Ar strafuilhoù anaoudel en deskiñ – Strafuilhoù
al lavar skrivet, La-15, pp. 376-382)*

NATUR AR STRAFUILHOÙ

Un naouuster eus ar strafuilhoù anaoudel eo kemer neuizioù disheñvel hervez prantad ar skoliadur, hep ma ve da lakaat o unded en argraf.

PEGOULZ DITOURIÑ ?

Mont a reer davet un arbennigour evit strafuilhoù el lavar teodel er skol vamm, evit strafuilhoù el lenn er c'helc'hiad 2, evit strafuilhoù en niveroniezh

er c'helc'hiad 2 pe diwezhatoc'h a-wezhioù, ha ral a wezh kent ar c'helc'hiad 3 pe ar skolaj evit strafuilhoù er reizhskriavañ. Koulskoude e ouzer ervat e krog frammidigezh an niver kalz a-raok derou ar skol kentañ derez hag e oar kelennerien ar skol vamm diurnat mat a-walc'h an kez strafuilh pa zinod. Mes rouez tre en en ditourer da'n oad-se. Gallout a reer emc'houlenn neuze pegen kizidik e vez an nestud, pe pegen gouest int da zarbenn ar forc'hadoù diouzh ar reol en ditouriñ ha, da heul, en deznaouiñ hag er prederiañ. Ha gallout a reer, lakaomp, bezañ nec'het gant torgammoù en arc'hwelerezh al lavar teodel, pa na vezont ket bras a-walc'h evit diaezañ ar c'hehentadur ha pa vezer prederiet, a hent all, gant piaouekadur al lenn el live 1 ?

LIES « GOULERC'H »

Eiltroüsted ar strafuilhoù, pa ra lakaat kemm etre ar *c'hleñvedoù gwir* hag ar *goulerc'hioù* diorreadur, eo a zo e kont amañ. E se aozerien zo ne reont ket anv a vigomz pe a vilenn nemet mar bez ar goulerc'h — bet muzuliet dre prouadoù arbennik — keit ha daou vloaz da nebeutañ. Pa vez bihanoc'h an dislank e reont ur goulerc'h anezhañ — dre skiant prenañ e ouzer e c'hell ar strafuilh, ma n'eo ket koazhañ, skañvaat ac'hoel. Goulakaat a reer enta ez eo an tead piaouekaat, a ve gorrekoc'h evit bugale 'zo, unan eus an argemmennoù da lakaat e kont, ha kareziñ ar skol pe ar gevredigezh na lezont ket amzer a-walc'h dezho. Goulakaat a reer ivez ne c'haller mann, pe nebeut tre, evit ar vugale all, ar re a van diwared an amzer hag an addiorren outo. Neuze e tegemerer ez eus d'ar strafuilhoù arbennoù nerverl pe vredkantaezel pe c'hoazh, e troioù 'zo, ez int andeznaouadus. Evit ar stadad kantouezel da vezañ direndael, ez eo re arzalet an deveizadurioù c'hoazh evit ma c'hallfed mont pelloc'h ganti.

Dav eo kounaat avat ez eo pep hini eus strafuilhoù ar rumm-mañ evel ur *c'hendalc'heg* evit a sell derez e c'hrevusted. Ha gallout a reer lakaat neuze ar strafuilhoù grevus pe etre da strafuilhoù deskiñ c'hoazh ?

AN ERDREVNADOÙ KEMPOUEZAÑ

Hep dilezel an denesadenn gentañ e c'haller, a gav deomp, kinnig unan all, deurus pergen da'r re zo o micher diougonañ pe addiorren. Ne vez pleustret, evit pezh a ouzomp, nemet war vaezienn biaouekadur al lenn. Da

gentañ e stader e vez techet ar vugale vilennek, muioc'h eget ar re all, da harpañ war ar c'henarroud da hennadiñ ar gerioù skrivet¹². E zienaat a c'haller dre c'houlenn ouzh bugale gwiriañ kevazasted ur ger diouzh ar skeudenn geñverek, hag e gantreizhañ pa vez nac'hek o respont. Evit a sell ar vugale vilennek ez anavezer ar *fenikiidi* diouzh ma tistaolont ar ger en ur ginnig kantreizhadennoù a ampleg an advonegañ mouezhiadel, hag ar *sinaidi* dre m'en darbennont. Un trede rizh respont zo, avat, anezhañ disteurel ar ger dre harpañ war ar c'henarroud skeudennet kinniget¹³. Lakaat a reer ez arver ar vugale-se ar c'henarroud evit ragarveziñ ur ger hag a-walc'h eo dezho ur wiriadenn darnel evit e zisteurel pe, mes rouez-tre eo, e reont van d'e lenn. En degouezhioù ma tremenont gant ur wiriadenn darnel e stader e c'hell an erdrevnadoù hennadiñ kenglotañ gant ar re bet arveret e derou dik an deskiñ : al lizherenn gentañ, trolinenn ar ger pe neuz ar ger mell gortozet, lakaomp. An doare arc'hwelañ-se a glotfe gant un *erdrevnad kempouezañ* embreget evit bastañ d'ur goulenn kevredigezhel a c'hell bezañ taer hag amplerus-tre da vugale na c'houlennont ket gwelloc'h eget deskiñ. Kavout a ra deomp ez eo heñvel evit *sinaidi* ha *fenikiidi*, nemet ez arverfent reizhiadoù *kempouezañ* efedusoc'h, dibabet eus ur c'huntellad kinniget gant ar vistri. Treiñ a ra pep tra neuze evel pa c'hallfe, pe pa zlefe, ar vilenneien dibab erdrevnadoù hennadiñ gerioù a-douez ur c'huntellad argerzhioù keweriañ ar stlenn skrivet, o tevetañ unan anezho, n'eo ket digen peurliesañ avat, pe ouzh o arverañ holl hep efedusted vras.

ERDREVNADOU « FORC'HAT » HA REOL^a

Dav eo merkañ ned eo *forc'hat* an kez erdrevnadoù nemet e stern resis ar milenn pe, mar distaoler an termen-mañ, e stern ar strafuilh e piaouekadur al lenn. Pleustret e c'hellont bezañ holl zoken, gant reizh, e prantad pe brantad eus an deskiñ. Evel-se ez eo reizh a-walc'h ober ur goulenn gwiriañ darnel (« *Pe dre lizherenn e krog ?* ») e derou an deskiñ lenn, pa na zeu ket ar vugale a-benn da anavezout ar gerioù. Gwerc'hus eo un hevelep goulenn da zelankañ ha da c'houkorañ un argerzh a unanzeskiñ hag a c'hourdonañ, ha ne dalvez mui diwar ma c'haller embreger an erdrevnadoù all. Mar bez ar re-mañ dreist diraez avat, e van talvoudus a dra sur en argeziadoù da reiñ he gortoz d'ar gevredigezh.

^a Sl. La-16, pp. 207-209.

Ret eo teurel pled, evit meizañ strafuilhoù anaoudel an deskiñ, ken ouzh tead an diorreadur, ken ouzh ar rizh erdrevnadoù arveret, na c'hellont bezañ enlusket hep degas dre ret destrizhoù war an deskiñ. Petra eo an kez destrizhoù neuze ?

AN DESTRIZHOÙ WAR AN DESKIÑ

Unan eus naouusteroù diwezhañ ar miarc'hwelioù studiet, nemet evit a sell ar miskriv nad eo ket bet en argraf c'hoazh amañ, eo bezañ kevredet en amgant al lavar.

STRAFUILHOÙ KEVREDET ALIES

Goude ma vezont deskrivet ent voas evel *azoniadoù* dizalc'h, e stader koulskoude e vezont kevredet alies e kefluniadoù liesseurt. War ar marc'had, ha daoust ma n'eus roadenn stadegel ebet a-zivout an doare, e oar an arbennigourien en o adkaver alies gant an hevelep bugale, a-feur ma talont ouzh deskoniadurioù nevez. Alies e kaver, lakaomp, strafuilhoù al lavar teodel e diagentoù^a ur bugel milennek pe strafuilhoù lenn e tremened ur mireizhskriveg. Diwar an daou gevredadur-se e sav kudenn a-zivout neuzioù 'zo eus al liammoù a vez etre an kez strafuilhoù.

AR MISKRIV DA SKOUER

Dres e ro deomp ar miskriv, pe strafuilh a'r c'houested da skrivañ ha da gevregañ, an dro da sevel ar goulenn. Evel ar strafuilhoù all e vez despizet dre ezkaelañ, ha kevredet alies gant strafuilhoù al lavar skrivet, evit e liamm ganto da vezañ nebeut anavezet, evel m'hon eus eñ gwelet. Gallout a ra bezañ lakaet e stern hollekoc'h ar *strafuilhoù a'r c'houested loc'hadel* ha, resisoc'h, e stern ar *strafuilh e piaouekaat a'r c'henurzhiañ*. Lakaet er-maez tro un erdrevnad da guzhat fazioù reizhskrivañ, pezh a vez goulakaet gwezhioù 'zo, e c'hell e liammoù gant al lavar skrivet bezañ a zaou rizh :

^a Sl. La-16, pp. 209-210

UN DESTRIZH WAR AL LAVAR SKRIVET

Gallout a reer lakaat, da gentañ, ez eus anezhañ un destrizh dre ma wana, e-kerz an obererezhioù skrivañ, an evezh lakaet ouzh reizhskrivadur ar gerioù, mes ouzh an neuziadur hag ouzh ar c'hevreadur ivez. Hevelep destrizh a lakafe ar vireizhskriveien da dalañ ouzh daou drevell, ouzh o rediañ da ingalañ o evezh, ha da ober *fazioù*. Gourlakaet ouzh an deskad lenner, e vez gentañ ur roll anat, mar asanter d'ar meno ez eo kevredet an obererezhioù lenn ha skrivañ hag ez int rekis o daou evit sevel ur priziadur hollek e maezienn ar yezh skrivet. Gallout a rafed ober anezhañ un destrizh arbennik da biaoekadur ar yezh skrivet.

UN DESTRIZH WAR AL LOC'HADELEZH

Diouzh un diarsell all e c'haller dezrannañ kevredadur ar miskriv gant strafuilhoù al lavar skrivet : tennañ a rafe d'ur strafuilh hollekoc'h e piaouekaet ar c'henurzhiañ loc'hadel. Merzhout a reer neuze ar saviadoù deskiñ evel saviadoù a'r rizh *diluziañ skoulmadoù*, ma emgav an desker a-dal d'un aridennad destrizhoù (diabarzh pe diavaez), kreñv pe greñvoc'h, o kenwezhiañ a-wechoù, skoilhus ouzh an deskiñ anaoudel ha skolel.

DESTRIZHOU DIAVAEZ

Luniad ar pezh a zo da zeskiñ a c'hallfed renkañ e-touez an *destrizhoù diavaez*. Evit al lavar teodel, lakaomp : ha gallout a reer piaouekaet en hevelep doare ur yezh a zo urzh ar gerioù enni digemm ha stabil, dre se stlennek-tre hag aes da zeveizañ (saozneg ha galleg, lakaomp), hag ur yezh nad eo ket ken strizh he ereadurezh ? Ne c'haller ket, anat. Hevelep aters a c'hallfed sevel evit al lavar skrivet : daoust ha dre an un erdrevnad e vez piaouekaet sinaeg ha fenikianeg, yezhoù disheñvel o skriturioù, arouzek an eil ha lizherennek eben ? Bez' e ve destrizhoù diavaez ivez gant doare ar gerent, ar gelennerien pe an addiorreerien all da wehentañ an deskiñ. An dro eo dres, evel m'hon eus gwelet c'hoazh, hervez kuntellad an erdrevnadoù kinniget pe an evezh lakaet ouzh an erdrevnadoù kempouezañ.

DESTRIZHOU DIABARZH

Bras eo perzh ar merzhout, ken klevedel, ken gweledel, en *destrizhoù diabarzh*. Hini an evezh, hini an eñvor ivez, a bouez war hir dermen evit piaouekaat anaoudegezhioù, hini al labour evit piaouekaat ar c'heriaoueg dre gomz pe dre lenn. Klasket hon eus, uheloc'h, lakaat anat pegen pouezus e c'halle bezañ ar c'houested da ziarzoukaat^a evit piaouekaat chemoù kenereet.

Hag evit klozañ ganti, an erdrevnadoù savet e-kerz an deskadurezh — an erdrevnadoù kempouezañ pergen — a c'hell gourlakaat destrizhoù all. Displegañ splann a ra BRESSON e rank ar vugale pa grogont da lenn, n'eo ket hepken talañ ouzh an deskoniañ nevez-se — anezhañ gounit ur varregezh tramouezhiadel diziouerus — met ivez *dizeskiñ* o barregezh — anemouez — da zazrannañ al lavar teodel a-barzh gounit unan all. An kez *dizeskiñ* — nad eo ket amplegad al lavar skrivet hepken moarvat — a c'hallfe gourlakaat destrizhoù ouzhpenn, arbennik da vugale ar *steredeg Mi*.

^a Sl. La-16, pp. 212-213.

DAVEOÙ LEVRLENNADUREL

- ¹ Abdelhamid KHOMSI, “Les troubles cognitifs de la scolarité ou la galaxie Dys”, in *Manuel de Psychologie pour l’enseignement*, Hachette Éducation, 1995.
- ² J. DE AJURRIAGUERRA (1974), *Manuel de psychiatrie de l’enfant*, Paris : Masson.
- ³ K.A. KAVALE, S.-R. FORNESS & T.C. LORSBACH (1991), Definition for definitions of learning disabilities. *Learning Disabilities Quarterly*, 14, 257-266.
- ⁴ W.J. LOVEGROVE (1991), “Is the question of the role of visual deficits as a cause of reading disabilities a closed one? A comment on Hulme”, *Cognitive Neuropsychology*, 8, 435-441.
- ⁵ K.E. STANOVICH (1986), “Matthew effects in reading : some consequences of individual differences in the acquisition of literacy”, *Reading Research Quarterly*, 21, 360-406.
- ⁶ R.J. STEINBERG (Ed.) (1990), *Metaphors of mind : conceptions of the nature of intelligence*, Cambridge, Cambridge University Press.
- ⁷ J. GREGOIRE (1992), *Évaluer l’intelligence de l’enfant, échelle de Weschler pour les enfants*, Liège : Mardaga.
- ⁸ J.S. GOULD (1983), *La mal-mesure de l’homme : l’intelligence sous la toise des savants*, Paris : Ramsay.
- ⁹ A. KHOMSI (1990), “Les précurseurs langagiers à l’acquisition de la lecture” in N. ZAVALIOFF (Ed.) *La lecture*, L’Harmattan.
- ¹⁰ A. KHOMSI (1987), *Épreuve d’évaluation des stratégies de compréhension en situation orale*, Paris : Editions du CPA.

- ¹¹ A. HUET (1994), *Le langage oral d'enfants dyslexiques et dysorthographiques*. Communication au séminaire du Laboratoire de Psychologie « Education, Cognition, Développement », Université de Nantes.
- ¹² K.E. STANOVICH (1982), Individual differences in the cognitive process of reading : 1 ; Word decoding. *Journal of learning disabilities*, 15, 485-493.
- ¹³ A. KHOMSI (1987), *Épreuve d'évaluation de la compétence en lecture : lecture de mots et compréhension*, Paris : Editions du CPA.